



Xmbourch

Niverenn 6

3laviz Mae

IMBOURC'H, KE LAOUENN BOLITIKEL

Niverenn 6

Miz Mae 1970

TAOLENN

Don Kich'ote hag ar milinoù - avel...p.135

Stad, kevredigezh ha sevenadur
(eil pennad : roll ha bevennoù ar galloud politikel).....p.138

Ur vroad sokialour bihan : Albania
gant Jakez ar Bihan.....p.145

Hollennegezh eus deroù ar c'hantved
Jos Dirlemm ar Bras.....p.152

Lizhiri.....p.155

Devezhioù - studi an hañvp.156

Daoust maz eo savet an darn-vuiañ eus pennadoù ar gelaouenn-mañ
gant izili eus EMSAV AR BOBL VREZHON ez eo embannet skridoù
IMBOURC'H dindan atebegezh an aozerion.

Koumanant-bloaz : 20 lur. K.R. Y. Ollivier, 1 534 25 Roazhon.

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver. Priz an niverenn : 2,00 lur.

Ar pennadoù hag al lizhiri a zo da gas da : EMSAV AR BOBL VREZHON

(IMBOURC'H) 30 pl. des Lices, Roazhon.

D O N K I C ' H O T E H A G A R M I L I N O U - A V E L

Sonjal a ra deomp o deus klevet hol lennerion komz eus gwallavantur Don Kic'hote en devoa argadet gant kalz a galonegezh ar milinoù-avel en em gave war e hent. Hama ! Kavout a ra deomp ivez ez eohañvel meur a emsaver en hon amzer ouzh an Don Kic'hote brudet-se ijinet gant Cervantes gwechall, pa fell dezho, n'eo ket mui dieubiñ Breizh hag adsevel ur vroad vrezhon hogen distrujañ da gentañ ar Gevalaouriezh etrevroadel.

Moarvat o deus komprenet ar stourmerion-se n'eo ket ar vroadelouriezh -hini ar broadoù bihan - da vezañ sevenet e Breizh hepken. Ar vent a zo d'hon Emsav a zo hini ar bed a-bezh en ur stumm. Ar pezh a zo ka aus avat eo ez eo techet an emsaverion nevez-se da gemmeskañ o stourm gant hini un dispac'h hollvedel - hini ar varksourion - ha na glot ket ar mennadoù anezhoñ gant re an Emsav peogwir ez eo bet meizet ha sevenet gant impalaerelourion nemetken, da vihanañ en Europa hag en Azia (ma lakaer a-ziforc'h ur stad evel hini Yougo-Slavia). Hogen maz eus tu e degouezhioù zo da implijout dezrannerezhioù zo eus an damkaniezh varksiat evit kompren saviadoù politikel zo ne cufe an Emsav - a zo dezhan un orin disheñvel krenn diouzh hini ar varksouriezh - degemer penn-da-benn an damkaniezh varksiat na dreist-holl dont tre en ur c'hoari politikel a zo renet e gwirionez gant impalaeriezhoù a ra dave d'ar varksouriezh.

Hiziv avat e hañval stourmerion zo bezañ chalet kalz mui - evit implijout o gerioù - gant an emgann hollvedel a-enep d'ar

ar Gevalaouriezh eget gant an emgann tostoc'h hon eus da ren evit adsevel ur vroad vrezhon el ledenez-mañ. Anat eo koulskoude n'eo ket ar gevalaouriezh a zo arvarus - evel kevalaouriezh - evit ar vroadelezh vrezhon sellet evel broadelezh , ar Stad c'hall ne lavaran ket ; hag houmañ a oa anezhi - a soñj din - kent na oa anv a gevala nag a varksouriezh ha bez e vo anezhi moarvat goude ma vo bet diazezet enni ar sokialouriezh, ma vez diazezet un deiz.

Eveljust e c'heller krediñ ez eo pouezusoc'h ar stourm a-enep d'ar gevalaouriezh eget ar stourm evit ar vroadelezh vrezhon hec'h unan ha gourzezañ adsavidigezh houmañ en tu hont da diazeziged ar sokialouriezh er bed (pe e Bro-C'hall). Hogen d'ar c'houlz-se e vefe ret mat d'ar stourmerion-se dibab o emsav. Rak seurt savboent ne c'hell nemet o degas da zilezel an Emsav brezhon deiz pe zeiz. E gwirionez, ma roer d'ar stourm evit ar sokialouriezh al lec'h kentañ e vior rediet, a-benn bezañ efedus, da zarbenn ur gensentidigezh hollvedel a vo divizet GANT AN IMPALAERIEZHO. MARKSAT DIAZEZET ENDEEV , evel-se eo ez eo isurzhiat ar P.C.F. e Bro-C'hall da veliezh ar Strollad komunour rusian ; evel-se ivez e ranko un emsav brezhon a lakafe da bennaenn bolitikel privelezh ar stourm a-enep d'ar Gevalaouriezh etrevroadel darbenn e stumm pe stumm dreistbeliezh an aozadur a renfe ar stourm -se war dachenn ar Stad c'hall. Kavout a ra deomp eta e tlefe ar stourmerion vrezhon da c'hortoz-se goulenñ bezañ enframmet en nerzh pennañ a gas war-raok ar stourm a-enep d'ar gevalaouriezh etrevroadel e Bro-C'hall. Anez se ne vo anezho nemet izili dilevezon

strollouigoù disranner, gouest hepken da skoilhañ labour ar
re nemeto a zo barrek da gas ar stourm-se da benn.

Ne gav ket din ez eo se a fell d'ar stourmerien-
mañ evelato. Deskent eta chom hep koll o amzer o tagañ - dre
gomz hepken a-hend-all - milinoù-avel ar 'evalaouriezh etrevroadel
a c'hcari e spered darn ar memes roll hag ar Yuzevelezh pe ar
Bloutokratiezh etrevroadel e speredoù lod all en un amzer a
voe. Lezomp ar babaou e-lec'h emañ. Kasomp da benn, da gentañ,
un emgann breizhat ha broadel rik ; krouomp ur gevredigezh hag
ur sevenadur brezhon ; enframomp anezho en ur stad. Ar peurrest
a vo roet deomp war un dro ha war ar marc'had.

ILTUD

=====

GERIOU DIAES.- P.135. KEVALAOURIEZH/KAPITALOURIEZH- DEZRANNERIEZH/doare da
zielfennañ, da rannañ un dra en e holl elfennoù.- SAVIAD/lec'h en em gaver
ennañ, emgav, stad.- DAMKANIEZH/teoriezh.-P.136. DARBENN/asantiñ da.- PRIVELEZH/
renk kentañ.-DREISTBELIEZH/ur veliezh a zo a-us d'ar re all.-P.137.STROLLIG/ bagad
bihan, bodenn vihan(ster politikel, enebet ouzh hini ur STROLLAD en deus, un tamm,
bennak, skouarn ar bobl.-P.138.- TILUEL o tont eus TILU : tiegezh sellet en e
gendalc'h a rumm da rumm.- GREZ/amzervezh.-KRAVEZ/religion, e-keñver meiz kentoc'h
eget kalon pe lidoù.-P.139.KAMMAMZERIAN/ kompren a-dreuz un darvoud en istor.
(eus kamm-amzer).- DIORREADUR/ Kreskadur(dreist-holl e-keñver armerzh, ekonomiezh).
ARGLOEZI - aotrouion o kaout ur veli bolitikel, dreist-holl er grennamzer.-
KENEMGAV/ Emgav istorel ez a meur a elfenn ennañ, politikel, armerzhel, kevredig-
ezhel h.a. UNYEZHAN/Kas da benn ur politikerezh a denn da lakaat ur yezh hepken
da drec'hiñ en ur vro.-140/EZTAOLIN/diavaezañ, diskouez, gant gericù, ur memoz
dreist-holl (diavaezañ a reer trivliadoù gant un emzalc'h h.a.)(ez-teurel, ez-
er-maez).-141.- SAVLEC'HIADUR/doare d'en em lec'hiañ e-keñver ur gudenn.
GMAZERIEZH/servij stadel.-ARVER/implij.142.- HOLLVELI/beli war bep tra/GWALLZISOC'H/
disoc'h fall. ARGERZH/kerzh war-raok.-EMRENDED/perzh ar pezh a zo emren.
143. GOUARNERIEZH/doare da ouarn ar vro.-144.- ISDIORREADUR/Stad un armerzh, un
ekonomiezh ha n'eo ket kresket ; stad ur vro he deus un armerzh seurt se.-DAZWASKAN/
Distennañ ar wask.-PERZHIEKAAT/lakaat da gemer perzh/145.- DISSEVENADUS/N'eus ket
tu da seveniñ.-DEVOUDOU/fedoù.- 146.-RIEZ/stad, sellet dreist-holl en he ziriegezh
(stad : sellet e-keñver kevreizh pe c'halloud).-AZONOU/merkoù anaout.KILSTOURM/
stourm argas.-147.- STADEGOU/feurjedadoù.-149.-GOPRSOUDARD/soudard gopret.-GREANTI/
Labouradeg.-150.-DREISTKRED/dreist d'ar pezh a oufed krediñ.- DEZVEG KOSPEL/Stroll
lezemnoù a zo mennet da gastizañ ar felladennoù hag an torfedoù.-151/KEMPENNELOURIEZH/
kelennadurezh ar re a fell dezho kempenn ur saviad politikel e-lec'h e ziskar evit
adsevel unan nevez(enebet ouzh dispac'helouriezh).- RIEZEL/ a denn d'ar hez,-
EMVELIEK/ a zo mestr warni penn-da-benn, o komz eus ur Stad, a denn he beli diouti
hec'h unan.

S T A D, K E V R E D I G E Z H H A S E V E N A D U R

(E i l p e n n a d : r o l l h a b e v e n o ù a r
g a l l o u d p o l i t i k e l)

g a n t H.K.

Gwelet hon eus ned eo ket ar Stad deroù ur gevredigezh, an disoc'h hag an enkorfadur anezhi ne lavaran ket. Diwar-bouez ul labour eus ar gevredigezh warni hec'h unan a aotre dezhi kemer emskiant anezhi hec'h unan eo en em stumm tamm ha tamm ur vroad hag ur stad. Klask a ra imp bremañ gwelout hag a-walc'h eo ar Stad evit derc'hel ur vroad hag ur gevredigezh en o sav.

Un emdouell skignet a-walc'h e-touez brogarourion zo (douget a-walc'h d'ar fetichennouriezh moarvat) eo an hini o laka da grediñ ez eo gouest ar Stad da ober eus ur bobl pezh a gar hag e c'hell kemm he c'hredennoù hag he stuz koulz hag he buhezegezh diouzh ma plijo dezhi. E gwirionez, roll ar Stad a-hed an istor ez eo bet derc'hel a-gevret ur stroll bennak a dud dre berzh al lezenn hag ar veliezh politikel, oc'h en em harpañ war ur gravez pe ur vennoziadeg bennak ha n'o doa ket krouet o unan, war ar yezh er grez arnevez, diouzh maz eo ar yezh-se stag ouzh ur gravez pe ur vennoziadeg lakaet da ziaz ar Stad. Se a zo c'hoarvezet pergen en tremened, p'en em gemmeske keal ar Stad gant hini ur glad tiluel perc'hennet gant ur brenin dileuriet en e garg gant ur veliezh speredel.

Embannet ez eus bet ur pennad amzer zo ur studiadenn diwar-benn an "diempradur" a vije bet kiriek da zrouziwezh ar Stad vrezhon. D'hor soñj ez eo un tammig aner ar seurt imbourc'h graet endro da ziskar hor broad. Hogen e ser ar Stad vrezhon end-eeun e c'heller en em c'houlenn ha n'eo ket bet diorreadur ha kreizennadur ar galloud stadel e Breizh er grennamzer abegoù an diskar-se dres. Rak lakaet o dije bet argloezi zo e Breizh, evel e Kembre, muioc'h a intrudu, muioc'h a c'halloud ha muioc'h a frankiz e kornog ar vro ez eus tu da empennañ o dije graet evit ar yezh kalz en tu-hont d'ar pezh a c'helle ober an duged c'hallegerion e kornog ar vro. Ar gentel nemeti a c'heller tennañ eus istor Breizh er c'heñver-se - hag a zo bet tennet meur a wech, a gav deomp - eo ne zleje ket renerion Vreizh bezañ staget ouzh o stad poblañsoù romanegerion nag ober o c'hêrbennoù eus kêrioù lec'hiet e rannvroioù ar reter (1). Rak tonket e oa d'ar re-se er c'henemgav armerzhel ha douaroniel a neuze - gorregezh ar c'hehenterezh h.a. - en em harpañ war ar metou a oa an tostañ dezho. Kammamzeriañ ne reer ken a-hend-all o c'hortoz digant an duged kas da benn ur politikerezh unyezhañ a-du gant ar brezhoneg o vezañ ma oa al latin er grez-hont yezh a sevenadur holl vroadoù Europa d'an ampoent (2) : e gwirionez ne oa ket harpet muioc'h ar romaneg eget ar brezhoneg e Breizh d'ar mare-se ; evit abegoù pleustrek e raed gant an eil yezh pe eben.

(1) Adarre, arabat ober eus ar stad pe ar yezh un idolenn. Breizhuheliz daoust d'o romaneg a zo bet e-touez gwellañ brogarourion Vreizh. Diazezet e oa unded ar vro war ul lezenn voutin h.a.
(2) Diferadenn Villers-Cotteret a-du gant ar galleg n'eo bet embannet nemet e 1542.

En eneb avat, evel m'hon eus merket endev, n'eo ket bet diempradur politikel Kembre nozus ouzh ar yezh o vezañ ma oa enteuzet an devezeion hag an "uhelidi" en ur gevredigezh hollgembraek he devoa ar yezh vroadel da venveg eztaoliñ he sevenadur. Dre vras eta, o terc'hel kont eus pezh e oa roll ar Stad en amzer-hont ne c'heller tennañ kentel ebet diouzh hon istorevit reiñ sol d'ar palioù en deus an Emsav merket dezhañ e unan e-keñver yezh. Gwiriañ a c'hellomp hepken e klote ar stad vrezhon er grennamzer gant ar gevredigezh a roe harp dezhi. A-hend-all, ur skouer kenstur da zegouezh ar Stad vrezhon ermarevezh-hont a c'hell sklerijennañ hon tezenn : ar Stad saoz-norman e Bro-Saoz a oa bet savet gant gallegerion hag he yezh kefridiel a voe ar galleg e-pad meur a gantved. Padal, ar pep brasañ eus ar boblañs a gendalc'he da saoznegañ (pezh n'oa ket an degouezh e Breizh en abeg da rannvroioù ar reter) : a-benn ar fin eta e voe trec'h yezh ar boblañs hag ar gevredigezh war hini renerion ar Stad.

Ar gwiriadur-mañ hon degaso da ober un evezhiadenn : ne c'hell ket ur bobl kennebeut kontañ war zalc'herion ar galloud ha kargidi ar Stad dre vras evit mirout he dishualded pe ar sevenadur he deus krouet (1). Ur skouer eus kement-se a gavimp da gentañ e degouezh ar Stad vrezhon : biskoazh ne glaskas ar gargidi anezhi aozañ ur stourmerezh efedus ur wech ma voe bet trec'het ar vro gant an alouber gall. Hogen en

(1) Tiliu an Tudur, a orin keltiek, a zilezas a-grenn ar vroadelezh keltiek ur wech m'o devoe kemeret ar galloud e Lunden. Int eo a glaskas saoznekaat Kembre evit startaat o galloud. E Bro-C'hall e kejomp gant Herri IV a renavias e feiz hag e vro orin evit gellout kemer ar galloude Paris.

amzervezh vodern e kavimp ur skouer splann a-du gant hor savlec'hiadur : e-pad ar brezel diwezhañ ne arnodas ket frammoù ar Stad c'hall herzel a-zevri ouzh beli an Alamaned o devoa bazhyezvet ar vro ; a-greiz ar bobl eo e teuas ar stourmerion a-enep d'an alouberion a-c'houdevezh. Bez e c'heller lavarout eta ez eo dalc'herion ar galloud prest bepred da blegañ d'ur galloud trec'h d'o hini evit mirout hini pe hini eus o brientoù : n'eus netra æsoc'h eget kempenn en un dreistframm ur framm aozet endev. Klozomp eta : evit en em zifenn ne c'hell ur gevredigezh, stadel pe zistad, kontañ nemet warni hec'h unan ; ne c'hell kemer sol nemet war ur gwazerezh distag diouzh ar galloud, dic'hoantek, ha na c'hortoz na korvo nag enor evit al labour a ra da skoazellañ ar gevredigezh. Ar c'hargiad, na zisoñjomp ket, a zo atav ur goprad ha dre se e vez atav da brenañ. Al louzoù : diorren ur spered a emroüsted hag a wazerezh kevredigezhel ar birvidikañ ar gwellañ e-touez ar boblañs a-bezh.

Hogen e keñverioù all n'eus ket da fiziout muioc'h er Stad. Houmañ a zo prest ivez dalc'hmat da wariañ uhelvennad ar gevredigezh dre an arver a denn dioutañ evit startaat he galloud. Anat eo ar c'hoarvezad-se tost da vat en holl stadoù europat er grennamzer koulz hag en amzer arnevez. Er grennamzer, da skouer, e kemere ar Stad c'hall digarez ar relijion da saveteiñ evit aloubiñ ha sujañ broadoù Okitania ; an hevelep stad c'hall a rae van adarre er seitekvet kantved da zifenn ar wir feiz a-enep d'an disivouderion evit

kreñvaat hec'h hollveli hag he mac'homerezh ; d'ar c'houlz-se ivez e klaske bazhyevañ an Iliz. Kement-se a ra ar Stad spagnat hiziv an deiz. Hogen, war ur bazenn all, ez eo heñvel mik emzalc'h ar stadoù komunour diazezet abaoe un hanter-kantved bennak en Europa, peurgetket gant hini Bro-Rusia e-lec'h e voe staliet ar"gomunouriezh" dre an nerzh hag ar feulster abarzh ma vije bet amzer da stummañ ur wir gevredigezh komunour a spered. Dre an diouer a aotrouniezh speredel distag diouzh ar Stad ez eo koezhet ar Stad rusian en ur mac'homerezh re-bar da hini ar stad Tzarat ergentaou. Gennet eo pep emdroadur e Rusia dre ma n'he deus ar gevredigezh enni emrended ebet e-keñver ar galloud stadel.

Gwallzisoc'hoù hevelep reizhiad a zo anatoc'h c'hoazh er broioù a zo bet staget ouzh bloc'h komunour reter Europa e dibenn ar brezel diwezhañ. An argerzh politikel a zo bet anvet "nevez-amzer" Praha a ziskoueze e klaske hepken ar gevredigezh er vro-hont kemer hec'h emrended endro hag enstummañ adarre ar Stad diouzh he spered. Barnet eo bet an daourannadur-se etre ar Stad hag ar gevredigezh evel un diempradur gant mistri wirion ar vro, elese ar Rusianed a chom, na petra, a-du gant unvaenegezh ar Stad kemmesket gant ar Strollad.

Frouezh put adsavidigezh ar mac'homerezh stadel a zo splann a-walc'h hiziv. Nebeutoc'he eget biskoazh e kemer ar geodedourion perzh e buhez ar gevredigezh ; troet int da sujidi ha dre se n'o deus peadra ken da zifenn ; prest int eta da n'eus forzh peseurt sklavelezh diavaez. Rak ar Stad

tchec'hat-slovakat-se, kreñv en diabarzh a-hervez, a zo e gwirionez ur Stad wan en diavaez peogwir emañ penn-da-benn dindan reolerezh ar Stad rusian ; prientiñ a ra adal bremañ stagidigezh ar Stad tchec'hat-slovakat ouzh ar Stad komunour rusian rak nerzh ha kreizennerezh ar Stad hec'h unan a c'hell tennañ a-wechoù da zistrujañ ar vroad a zo an tu-koll ganti en ur c'henemgav bennak. A-hed an istor (1) e kejomp gant skouerioù broadoù trec'het a zo bet sammet warno gant an enebour gouarnerezhioù kreñv e sell d'o derc'hel gwelloc'h dindan o beli. Sklaer eo e vez diaesoc'h d'an alouberion dont a-benn eus ur vroad a vir ar galloud da eztaoliñ he buhez ha d'en em urzhiañ en he frankiz.

Moarvat ez eus ezhomm eus ur Stad hag ur galloud evit diwall ur vroad ; diot neb henn nac'hfe. Dall e vefe ivez avat neb na verzfe ket e rank ar stad-se bezañ reolet e pep pazenn gant ar gevredigezh he deus he c'hrouet evit bezañ en he servij. Ar pezh a fell deomp dispenn hepken eo mojenn an unstrollad hag ar Stad kreñv ha na c'hoarvezont peurvuiañ nemet eus un toulladig mac'homerion o deus skrapet evito ar galloud ha n'o deus ken mennad nemet e virout dezho o unan, oc'h en em harpañ war ar framm stadel o deus aozet hag ivez war ur galloud estren trec'h d'o hini. Se a zo c'hoarvezet end-eeun e broioù komunour ar reter abaoe 25 vloaz (kv. ar prosezoù graet war urzh ar Stad rusian er broioù-se). Hag ar walenn-se eo a vennomp argas diouzh Breizh(2).

(1) Amañ e c'hellfed menegiñ skouer gouarnerezh an Tregont diazezet en Aten trec'het gant Sparta en henamzer.

(2) Diferadur ebet ne zlefe bezañ kemeret abarzh ma vije gounezet dezhañ ar pep brasañ eus ar boblañs.

E degouezh Breizh, a-hend-all, o vezañ pezh
ez eo stuz kevredigezhel Breizh evit ar poent, ne oufe padout
ur Stad kreñv enni nemet en em harpañ a rafe war ur galloud
estren bennak. Dre ma pledfe da gentañ gant an armerzh - digarez
ar Stad kreñv da sevel a vefe an isdorreadur da lemhel - ne
glaskfe ket ar Stad-se lemhel c'hoazh droukrañs ur boblañs
c'hallekaet o sammañ warnipouez un argerzh unyezhañ taer ha
na vefe ket diouzh he grad ; gwirheñvel eo e vefe ar brezhoneg
hag ar brezhonekaat an amkanioù a vefe an aesañ aberzhet
gant ur renad en ðefe diazezet e stourm war arbennoù armerzhel
da gentañ - ha se, moarvat, a-benn dazwaskañ barr an tennder
a savfe er vroad dindan ur gouarnerezh hollveliek end-eeun.

Klaskomp ober un dastumenn eus kement hon eus
displeget er rannbennad-mañ.

- N'eus ket da gentañ war zalc'herion ar galloud
evit difenn ur gevredigezh bennak adal ma n'eo ken reolet
ar re-se gant ar gevredigezh hec'h unan.

- Gwazerezh ar vroad a zo atav ur gwazerezh a
youl vat ; er gwazerezh dic'hounid-se emañ gwir nerzh ar
vroad. Dav eo eta diorren ar gwazerezh-se ar muiañ ar gwellañ ;
digreizennañ ar galloud hag an atebegezhioù ar muiañ ar gwellañ
evit perzhiekaat ar muiañ a geodedourion ar gwellañ e buhez
ar gevredigezh.

- Kempouezet e vo digreizennerezh an divizerezh
politikel hag armerzhel gant nerzh hag efedusted al lu hag ar

c'herreizh hogen roll ar re-mañ a rank chom bevennet strizh d'an difenn diavaez ha d'an urzh diabarzh ; se zo lavarout ne c'hell ket ar galloud emellout war-eeun e buhez politikel ar vroad, pezh a ra ingal er broioù m'eo bet sterniet ar boblañs e frammoù kenstur an unstrollad hag ar Stad.

- Kement-se zo lavarout en diwezh e rank pep diferadur politikel kaout asant ar pep brasañ eus ar boblañs a-raok bezañ lakaet da dalvezout.

(En niverenn a zeu e vo studiet kudenn an "aotrouniezh speredel")

+++++

UR VROAD SOKIALOUR
BIHAN : ALBANIA, gant
Jakez ar Bihan

Pep broad a chom dibar ha daoust d'he ment a c'heller keñveriañ ouzh hini Breizh n'he deus ket Albania kalz tra boutin gant hor bro-ni nemet ar vent-se end-ecun (anat eo e chom

ar broioù keltiek all ar re dostañ da Vreizh). Degouezh Albania evelkent a zo deuet a-benn da ziazezañ un dishualded klok e-keñver ar broioù amezek ha dreist-holl an impalaeriezh soviedat (a-drugarez da skramm Yougoslavia evit darn moarvat) a zellez bezañ studiet pa ne ve nemet evit diskouez penaos e c'hell ur stroll bihan a dud mennet start ha kenurzhiet strizh dont a-benn da stummañ ur vroad diouzh e vennadoù. Moarvat e oa an danvez aes da verat : evel ma verk hor c'henlabourer ez arvested en Albania ouzh holl azonoù an isdiorreadur, dizeskadurezh, tavantegezh hollek, diouer a ijinerezh, diouer a renkadoù-etre h.a. Se zo merkañ ivez n'eo ket sur o dije gallet an hevelep dispac'herion kas da benn o mennadoù en ur vro all. Er c'heñver-se e vefe dudius imboure'hañ perak komunourion all, d'an hevelep mare, e Bro-C'hres, n'o deus ket tizhet o falioù daoust d'un derez bennak a isdiorreadur enni (kreñvoc'h e oa marteze ar vourc'hizelezh eno, hag unvanoc'h an hengoun speredel eget en Albania da skouer).

~~~~~

Tud a zo en Emsav evit krediñ e ranko ur Stad vrezhon heuliañ an hent sokialour. Gwall ziresis e chom en o speredoù skeudenn ar Vreizh sokialour-se ha ma ne fell ket deomp chom er c'houmoul o steuiñ mojennoù kaer met disevenadus e rankomp tostaat ouz devoudoù gwirion ha resis, studiañ perzhioù mat ha perzhioù fall an arnodoù

sokialour e broioù all. Dre ma ne seblant ket darev riezoù Kornogeuropa da zegemer ar sokialouriezh (eveljust ne sellomp ket ouzh Harold Wilson ha Willy Brandt evel ouzh sokialourion) e vo kalz diaesoc'h c'hoazh sevel ur Vreizh sokialour e-kreiz broioù kevalaour. En istor avat e kavomp skouer div vro o deus roet dezho o unan ur renad hag un armerzh sokialour ha kengladel daoust da eneberezh o amezeion : Kuba hag Albania. Tostoc'h da Vreizh eo Albania, lec'hiet ha maz eo en Europa, ha dezhi un diriegezh hag ur boblañs a c'heller keñveriañ ouzh re Vreizh. Anat eo ne c'hellfeket riezoù ec'hon evel an Unvaniezh soviedel pe Sina bezañ skouerioù evidomp dre m'eo re zisheñvel o degouezh diouzh hini Breizh. Kentelius e c'hell bezañ er c'hontrol studiañ istor ur vro vihan evel Albania hag a zo deuet a-benn da ziorren buan hec'h armerzh hag he greanterezh dreist-holl, daoust d'an diouer a dud stummet hag a binvidigezhioù naturel, daoust da eneberezh ar bed tro-dro dezhi. Ne fell ket deomp digeriñ ur vreutadeg er pennad-mañ hogen, hepken, degas stlenn evit un daeladeg da-zontven Emsav.

### §§§

Ar bihanañ hag an nebeutañ anavezet e-touez ar riezoù sokialour ez eo Albania. Betek un nebeut bloavezhioù zo ez eo bet ar vro warlerc'hietañ en Europa ha diskouez a rae en un doare skouerel holl azonoù an isdiorreadur ; Albania en em gave e gwirionez en Trede bed. Dezhi ur gorread a 28748 km<sup>2</sup> hag ur boblañs a 1 914 000 annezad ez eo Albania ur vro veneziek tre (lein uhelañ : 2 764 metrad) ; diyac'hus ha paludek e oa ar c'hompezennoù enni.

Ar brasañ disfiz o deus bet Albaniz a viskoazh ouzh o amezeion o deus klasket bepred o zrevadennañ. Kasoni o deus zoken ouzh an Italianed, ar C'hresianed, Yougoslaviz, ar Rusianed, ar Saizon hag an Amerikaned (o doa skoazellet o c'hilstourm e dibenn ar brezel-bed diwezhañ). Ur c'hevredad o deus hepken : Sina Mao Dze Dong.

### Y e z h   h a   s e v e n a d u r

Ur yezh indezeuropek eo an albaneg, komzet gant ouzhpenn daou vilion a dud - kv. pezh a lavar diwar e benn Meven Mordiern

en e "bPrederiadennoù..." - hag o tennañ e orin moarvat eus an henillirianeg. Albanegerion a gaver e Bro-C'hres, Yougoslavia hag Italia. Bez e oa div rannyezh en Albania, an tegeg en Norzh hag an toskeg er c'hreisteiz ; deuet eo houmañ da vezañ yezh kefridiel ar riez e 1945 ha skrivet e oa dija abaoe 1908 gant lizherennoù latinek.

N'he deus ket gellet bleuniañ al lennegezh vroadel a-raok frankiz ar vro e 1912. Dre ziuver a lizherenneg hag en arbenn a ziaested ar c'hehenterezh, a eneberezh ar melestradur turkat ne oa ket bet unvanet na skrivet zoken an albaneg. An oberennoù albanek kentañ a voe skridoù kravezel savet gant Albaniz divroet da Italia e Sikilia pe o chom e Shköder ("Scutari"). Adalek ar 16vet kantved e voe troet meur a zornlevr kravezel e trefoedaj albanek ha savet e voe ar c'hentañ geriadur albanek e 1635. Krouet e voe e 1879 kevren Prizren evit buanaat unvanidigezh ar yezh ha krouiñ al lizherenneg. Albaniz divroet e Bucuresti pe e Kêrgustantin a embanne kelaouennoù hag e 1899 e voe savet gant Sami Frakëri manifesto ar vroadelouriezh albanat : ALBANIA, PEZH EZ EO, PEZH E VOE, PEZH E VO. Kevredigezhioù sevenadurel a ziwanas mui-ouzh-mui, o studiañ ar folklor hag ar sevenadur poblet. Ur rummad stank a skrivagnerion vroadelour en em ziskouezas e deroù ar c'hantved hag abaoe 1912 e kaver en Albania ul lennegezh pinvidik tre a live gant lennegezhioù all ar bed.

§

Ur vro vuzulmat eo Albania ha daoust d'an diouer a stadegoù e soñjer ez eus enni war-dro ur milion daou-c'hant mil a vuzulmiz. Niver ar reizhkredennoù a sav da 300.000 oc'h ober un iliz "embenn" abaoe 1945. En hanternoz e konted 200.000 katolik met disrannet int bet diouzh Roma e 1951. Stourmet en deus al levieriezh sokialour ouzh ar gravez adal an deroù ; ret eo lavarout he doa houmañ abaoe pell un neuz estren hag e oa anzhi ur skoilh d'an araokaat. Ar gravez katolik a verke al levezon italiat, an hini reizhkredennek hini Bro-C'hres hag an Islam, daoust dezhañ bezañ relijion an darn-vuiañ eus broiz a oa liammet d'an aotrouniezh turkat: en ur ger, n'o deus ket bet Albaniz biskoazh a relijion vroadel.

E 1965 ez eo bet serret an holl lec'hioù-pediñ hag e miz c'hwevrer 1967 en deus deraouet un argerzh heskinañ nevez a-enep d'ar gravez : dre se e felle da Albania kemer perzh en "dispac'h sevenadurel bras" loc'het e Sina. Diskar a reer ilizoù ha moskeennoù.

### I s t o r h a b u h e z p o l i t i k e l

Daoust dezhi bezañ ur vroad kozh noe n'eo deuet tre Albania da vat en istor nemet er pemzekvet kantved gant Skandenberg an haroz broadel a zieubas ar vro hag he dalc'has dieub e-pad 25 bloaz daoust da arsailhoù dibaouez an Durked. En henamzer hag er grennamzer e oa bet aloubet ar vro gant Gresianed, Romaned, Bizantiniz, Kroazidi, Serbiz hag evit echuiñ an Durked a chomas mistri war ar vro e-pad 450 vloaz. Anv ar vro, Arberia pe Albania, a zeufe eus ar ger SHQIPERIA a dalv an erer en albaneg, Albania a vefe neuzebro an erered.

Meur a emsavadeg a darzhas war-lerc'h marv Skandenberg met hini ebet ne badas en tu-hont d'un nebeut mizvezhioù. E-pad m'edo an impalaeriezh turkat o wanaat e paras un noblañs lec'hel maz eo bet miret an anv anezhañ : ALI, pacha brudet JANINA. Kavout a reas an impalaeriezh servijerion veur evel Mehmet Ali a renas war an Ejipt. Padal e touge ar boblañs gant poan yev. an estren a nac'he he ferson-elezh vroadel hag a zifenne kelennadurezh an albaneg. An eil war-lerc'h eben e tarzhas emsavadegoù e dibenn an naontekvet kantved hag e deroù an ugentvet. Embannet e voe frankiz ar vro e 1912 hag anavezet e voe er bloaz war-lerc'h gant ar riezoù bras a fizias ar gurunenn en ur priñs alaman, Wilhelm von Wied, a dec'has kuit diouzh ar vro e penn-kentañ ar brezel bed 1914.

Evit gounit war Italia kemer perzh er brezel e kinnigas Breizh-Veur, Bro-C'hall ha Rusia d'ar vro-se un darn eus tiriegezh Albania ha reolerezh war ar peurrest eus ar vro vihan-se. Un nebeut mizioù goude e oa deuet Albania da vezañ un emgannlec'h evit luoec'h c'hwec'h riez. Al lu gall a anavezaz neuze gouarnamant ar republik diazezet e kêr Kortcha hogen e miz Du 1917, evit plijout d'ar C'hresianed, e fuzuilhas ar C'hallaoued rener ar Republik. Diwar an amzer-se e chomas e Kortcha ul lise gall e-lec'h e voe stummet ar vourc'hiziezh albanat betek 1939. En o zouez edo Enver Hoscha ha meur a rener eus



Albania a vremañ. Touiñ a reas ar re yaouank-se dieubiñ o fobl diouzh ar baourentez hag ivez ar c'h-laddale'helezh.

Divizet e oa bet e 1919 e kendalc'h ar Peoc'h rannañ Albania etre Italia ha Gres hogen un dispac'h a dartzhas e 1920 a roas ar galloud da Ahmed Zogu ; hemañ en em zalc'has evel un diktatour o terc'hel ar vro en ur stad war-lerc'hiet kenañ. Diskaret e voe gant un dispac'h bourc'hizel e 1924 met distreiñ a roas gant skoazell gopr-soudarded yougoslaviat ha rusian gwenn. Kemer a reas an titl a roue Albania e 1928 dindan an anv a Zog kentañ hag asantiñ a reas da levezon Italia a oa o kreskiñ dre ar vro. Nac'hañ a reas avat an unvaniezh maltouterezhel mennet gant Mussolini hogen hemañ a gasas ar strollad-listri brezel italian ha Zog a rankas plegañ. Da Wener ar Groaz e tilestras al lu italian er vro a voe staget ouzh kurunenn Vittorio-Emmanuel.

Ar boblañs a enebas un nebeut hogen dalc'hidigezh ar vro a roas lañs d'an armerzh a oa chomet isdiorreet kenañ betek neuze. Micherourion italian e-leizh a zilestras ; digeriñ a rejont hentoù ha sevel greantioù hogen dizale e tarzhas ar brezel etre Italia ha Gres ken e voe aloubet kreisteiz Albania gant ar C'hresianed en dro-mañ ; ar re-mañ a felle dezho stagañ ouzh o riez an darn-se eus Albania dre ma oa o chom enni ur bihanniver gresian. Lakaet e oa bet Albaniz da stourm el lu italian met drouklamm en devoa al lu-se hag an Duce a skrivas da Hitler e oa bet "trubardet" gant Albaniz.

Erruout a reas an Alamaned neuze ha kemm a reas an traoù penn-da-benn. Daougementet e voe gorread Albania e 1941, e miz Ebrel, gant stagadur rannvro Kossovo ha Norzh Gres. Albaniz a genlabouras gant an alouberion ha ne ouie ket renerion al luskadoù kleizat petra ober a-raok an deiz ma tagas Hitler an Unvaniezh soviedel. D'an 8 a viz Kerzu 1941 en em unanas al luskadoù-se ha krouet e voe Strollad albaniat al labour (komunour) dindan renerezh Enver Hoxha.

A-benn un nebeut mizioù e oa bet dieubet kornioù-bro a-bezh tra ma oa krouet aozadurioù-dieubiñ enep-konurion d'armet er "Balli-Kombetar" a nac'has kenlabourat gant Strollad al Labour. Goude m'he devoe Italia en em zaskoret e kendalc'has ar stourm gant ur feulster spontus etre an Alamaned, ar Genlabourerion, ar Komunourion ha soudarded ar "Balli Kombetar". Lazhet e voe 28 880 Albanad, distrujet

e voe un drederenn eus an tiez, eus ar chatal hag eus ar gwiniegi. D'ar 17 a viz Du 1944, goude un emgann a badas 19 deiz e teuas ar jeneral Enver Hoscha tre e kêr Tirana gant e vagadoù gouvrezelidi. D'an 29 a viz Du e kouezhe ivez Shkoder (Scutari), eil kêr vras Albania hag e dibenn ar bloaz e oa dieub an diriegezh vroadel a-bezh. Ar vro nemeti e voe Albania da vezañ en em zieubet hec'h unan hep skoazell ur galloud bras.

Emgannoù a voe c'hoazh etre nerzhoù ar gouarnamant komunour hag e eneberion : kenlabourerion gozh, katoliked, sokialourion ha kouerion enebet ouzh ar c'hengladerezh. Goude dilennadegoù 1945 e voe embannet ar republik gwerinel hogen e miz Gwengolo 1946 e klaskas c'hoazh bagadoù disuj harpet gant broioù ar C'hornog arsailhañ Shkoder. Ur c'hwitadenn e voe ha mouget e voe pep eneberezh en un doare kriz kenañ. Hentennoù garv a voe heuliet gant renerion Albania. evit lakaat ar vro ar muiañ isdiorreet en Europa da vevañ diouzh uhelvennadoù ar varksouriezh-leninouriezh.

Setu 25 bloaz abaoe m'emañ Albania o vevañ dindan ur renad komunour ha maz eo bet kriz meurbet an amplegoù anezhañ e ranker gwiriañ evelato he deus gallet ar vro-se ober araokadennoù dreistkred war dachenn an armerzh, evel ma welimp pelloc'h. Renet eo ar riez gant poellgor kreiz Strollad al Labour, Henver Hoscha o vezañ e gentañ sekretour. Bep pevar bloaz e vez dilennet ur parlamant, ennañ 240 kannad (n'eus nemet ur roll en dilennadegoù eveljust : hini an Talbenn demokratel albaniat). Pep hini a-us da driwec'h vloaz en deus ar gwir da vouezhiañ. Ar parlamant, bodet div wech ar bloaz a anv ar gouarnamant, ennañ trizek mavdiern, hag a sav al lezennoù. An dezveg kospel a zo bet eilskrivet diwar an hini soviedat nemet ez eo garvoc'h c'hoazh, ha strishoc'h (e 1956 e voe savet).

Rannet eo tiriegezh e 27 pastell-vro, rannet d'o zro e kumunoù ; kuzulioù-pobl a vez dilennet er c'humunioù, evit tri bloaz, ha pleustriñ a reont war ar c'hudennoù armerzhel ha sevenadurel lec'hel.

Albania a zo ezel eus Aozadur ar Riezoù Unanet hogen ne gemer ket perzh en adaozadurioù anezhañ (Glad moneizel etrevroadel, arc'hanti etrevroadel evit an adsavidigezh hag an diorrenh.a.)

Ezel e oa ivez eus ar c'henvarc'had sokialour ha sinet he doa feur-emglev Warschaw met torret he deus e 1962 hec'h ereoù gant an Unvaniezh soviedel hag ar riezoù sokialour all ; dija e 1948 he doa torret he liammoù gant Yougoslavia ; he c'hevredad bras a zo hiziv Sina Mao Dze Dong. Ur sokialouriezh glan ha strizh a zo difennet gant Albania ha bemdez ivez e vez tamallet ganti kempennelouriezh an Unvaniezh soviedel hag he c'hevredidi e Radio Tirana. N'eus ket diwanet enni ur vourc'hiziezh nevez evel er broioù sokialour all, ur renkad nevez a vistri : chom a ra ar renerion tost tre ouzh ar bobl. Bez ez eus o ren er vro-se un aergelc'h a genurzh hag a rustoni na gaver nemet e Sina. Ne vez bannet er fiñvskeudenndioù nemet filmoù a skouer vat ; ha ne gaver el levraouegoù nemet levrioù a vruderezh sokialour, koulz lavaret. Sellout a reer ouzh an hiniennegezh evel ouzh un "diroudennadur" politikel pe gentoc'h ur c'hleñved a ranker parañ. Krennet eo bet ar goproù uhelañ ken n'o deus mui <sup>/nemet</sup> teir gwech talvoudegezh ar re izelañ. Kengladekaet eo bet an armerzh a-bezh, zoken ar gounezerezh henvoazel er menezioù, daoust ma voe diaes meurbet. Emañ an atantoù riezal o kemer mui-ouzh-mui hiziv lec'h ar c'hevelourioù.

Unan eus brasañ sevenidigezhioù al levrierezh sokialour a voe an deskadurezh : an holl vugale a heuilh ar skol e-pad eizh vloaz hag ouzhpenn 12 800 studier a gaver er Skol-veur, 7 000 anezho e Tirana. Evit mirout outo a gemer ur spered bourc'hiz e rankont tremen un darn vras eus o amzer o labourat gant o daouarn. Kaset ez eus bet un darn anezho, da skouer, da zifraostañ an torgennoù gant ar ger-stur : "Krogomp en torgennoù hag er menezioù evit o c'haeraat hag o lakaat da vezañ ken emsavus hag ar c'hompezennoù." Bez ez eus studierion all o sevel ul linenn hent-houarn nevez etre Kêr Elbasan ha gweleadoù kailh-houarn Pish-kash. Staget evel merion ouzh diribinoù ar menez e kleuz kantadoù a baotred hag a verc'hed ar reier gant pigelloù. E meur a geñver e hañval Albania bezañ ur Sina vihan...

(Da genderc'hel gant ARMERZH ALBANIA)

---

H O L L E N N E G E Z H E U S D E R O U A R C ' H A N T V E D

K u z u l i o ù a n t a d - k o z h

gant JOS DIRLEMM AR BRAS

Pa voe kont da Vari-Janig da zimeziñ, a, tad-kozh  
a gomzas outi evel henn :

- Merc'h ker, gouzout a rez petra emhout o vont  
d'ober ?

- Drolat goulen !

- An dra-se a c'houlennan abalamout m'em eus aon  
na vefes tentet d'ober evel un niver bras a genc'hoarezed :  
kemeret an dimeziñ evel ur c'hoari, en em lezel da vezañ bevet  
gant ur gwaz hag a labouro evit daou, tri, pevar, hervez niver  
ar vugaligoù a zeu.

E-lec'h an dra-se, setu ar pezh a garfen e rafes :  
e-pad m'emañ da Yann er park, te, goude preder an tiegezh (da  
vrasañ labour gant hini ar vousedigoù), a gav ur pennad amzer  
marteze da ziskuizhañ, pe, da vihanañ, d'ober ul labour skañv.  
Petra d'ober ? P'ac'h eus ur pennadig amzer hag eo dilabour da  
spered ha da zaouarn, kemer BRUG ha lenn anezhañ.

- BRUG ? Met BRUG a zo graet evit ar wazed!

- Hag ar merc'hed ivez ! Da Yann n'en devo ket  
amzer da sellout outañ kerkent ha ma tegouezho. Te a lenno an-  
ezhañ. Amzer az po da ruilhal dre da spered ar mennoziou az po  
gwelet displeget er gazetennig. Te o lavaro da Yann, ha Yann ha n'en  
dije ket soñjet lenn ar baperenn-se, a zesko evel-se meur a dra  
talvoudek evitañ hag e vicher.

N'eo ket holl. Te ' zeuio da goshaat (ar pezh na hetan ket dit re abred) ha da vugale da greskiñ... E-lec'h o c'hustumiñ da lenn, e-pad ar vakañsoù, romantoù disliv ha treut hag a gont dezho marvailhoù dibrofit, perak ne lakafes ket anezho da lenn BRUG ivez, da lenn kelaouennoù all heñvel ouzh BrUG (spered kouer ha brezhon) hag a lavaro dezho ar wirionez, a briento anezho d'ar vicher labourer-douar ez int galvet d'ober diwezhat-oc'h, a zesko dezho penaos en em zibab war ar maezioù evit chom hep bezañ debret gant tigred ar "Binvidigezh" a gred eo c'hwezenn Yann Gouer o feadra hag e tle pep penn-ed o tiwanañ bezañ ur pezh aour evit o yalc'h.

Setu petra a lavare an tad-kozh. N'eo ket ravodal a rae.

=====

E v i t d o u a r B r e i z h

gant JOS DIRLEMM AR BRAS

Yann Gouer, anaout a ran ac'hanout adalek da vugaleaj. Ganet omp amezeion hag atav hon eus dalc'het an eil e-keñver egile gwir vennozioù a vignoniezh.

An amezegiezh hag ar vignoniezh kozh-se a ro un tamm gwir bennak din hiziv da zont da brezeg dit. Prezeg n'eo ket ar ger a fell, da gaozeal ganit eo kentoc'h.

Setu penn va c'hudenn.

Karout a rez kalz da diegezh, betek henn, krediñ a ran... Karout a rez c'hoazh an douar met n'er c'harez ket dre garantez direizh, divizul, n'er c'harez ket a-walc'h rak - gwir eo? -

war zigarez maz eo treut frouezh da zouar e fell dit kuitaat anezhañ.

Ha soñjet ac'h eus mat, en da benn kalet, petra zegouezho da heul an divroerezh-se ?

Az pezet soñj penaos an ugent devezh arat a zo dindan da diegezh, ur wech ma vi aet kuit, a dremenno e daouarn estren - hag aze, war ribl ar mor pe en draonienn heurch ouzh ar stêr, un divroad a erruo da gemerout ar pezh a oa da beadra, a savo warnañ manerioù hag a lojo tud, n'eo ket Brezhoned, met divroaded ha divroadezed.

Ugent devezh arat kollet evit Breizh ! Ugent devezh arat war bere e vevo tud hag a raio er c'harter ar fallañ labour, al labour milliget : divrezhonekaat ar bobl.

Hag ar gwashañ pezh zo, Yann Gouer, te ' zo meur a hini, da lavarout eo, kalz a ra evel dout, evit eurvad fazius ar c'hêrioù a zilez ar maezioù. Ha da ugent devezh arat a zo da vezañ kresket 10 gwech, 100 gwech!... Eus ar 7.000.000 a zevezhioù arat a gont Breizh, nag a hini a dremen bep bloaz etre daouarn tud divreizhek.

Karantez an douar a zle ordren dit chom war ar maez; da vad da unan a c'houlen an dra-se ; da yec'hed, yec'hed da gerent a zo ivez da lakaat e kont.

"Doue hon greas labourerion, labourerion chomomp!"  
en deus lavarot Brizeug.

Bazhadoù dizamant d'an enebourion a glask mirout ouzhit a wellaat da stad war ar maezioù, a glask dinac'h ouzhit perc'henniezh un douar a labour da dud, a rumm da rumm, abaoe

kant vloazioù... Un dever sakr eo enebañ ouzh ar fallagriezh,  
met arabat dit, dre vank kalon, tec'hout diwar an dachenn.

Gwella da stad, na glask ket unan hag a ve falloc'h.

+++++

LIZHIRI

21.04.70

"Resev a ran IMBOURC'H bep miz ha pennadoù zo am  
eus kavet poellek ebarzh ; eeunoc'h e kavan ho termenadur eus  
an Emsav eget hini E.S.B.

Poentoù zo a garfen gwelout displeget fraeshoc'h  
ivez. Pe bal resis zo d'ho kelaouenn ? Hini ur gelaouenn a  
studioù politikel hollek pe hini ur gelaouenn vrudañ o skignañ  
ur mennoziadur resis ur strollad politikel resis ? Pe bal a zo  
da E.B.V. ? Sevel ha frammañ e Breizh ur gevredigezh a vrezhon-  
egerion hepken pe bezañ ur strollad brudañ hag heñchañ mennet da  
gas hor pobl d'an dispac'h ?

An daou ez eo moarvat hogen re luziet e chomo c'hoazh  
ar gevredigezh da zont a ginnigit d'hor pobl keit ha n'ho po ket  
graet an dibab etre ar reizhiad kevalaour hag an hini sokialour.  
M'hon eus da zieubiñ ar brezhon evel brezhon hon eus ivez d'e  
zieubiñ evel den.

Displijet krenn on bet o lenn pennadoù zo eus  
IMBOURC'H o komz eus ar sokialouriezh en un doare direizh : mat  
e vefe d'ar re a gont randonachoù diwar-benn ar frankiz - tud  
peurliesañ sanket e don o c'hador-vrec'h en ur sal dommet mat -  
dont da gejañ gant kouerion ha micherourion hor bro evit gouzout  
petra eo evit un den an dishualded..."

R. Ne c'hellomp ket respont dre ar munud d'hor  
c'henskriver. Merkomp hepken - e-keñver dibab etre ar sokialouriezh  
hag ar gevalaouriezh - n'emañ ket an dibab etre an div reizhiad-se  
hepken ; meur a seurt sokialouriezh a zo ; ar re a ra dave da vMarks zoken  
n'int ket unvan kenetrezo. Ar reuzeudigezh, ar c'horvoerezh a zo  
da lemme er bed hag en hor bro ne zleont ket kennebeut bezañ un  
"alibi" evit diazezañ n'ouzon pescort stalinoouriezh en hor bro ;  
evit mad ur mafia bennak a zalc'hfe ar veli dre an nerzh evel maz  
eo c'hoarvezet e nouspet bro sokialour ha nevez zo e Tcheko-slovakia.

Arabab eo kemer ar ger dispac'h en ur ster romantel,  
evel hini emsavadeg ur bobl wasket h.a. Emañ an dispac'h e kement  
labour politikel a denn da grouiñ ur gevredigezh nevez. Dre se, netra  
nemet o sevel ur gevredigezh vrezhon nevez ez eo E.B.V. un emsav  
dispac'hel.

IMBOURC'H n'eo ket kelaouenn kefridiel E.B.V.  
Hemañ n'eo ket diorreet a-walc'h evit kaout ur gelaouenn  
gefridiel. Evel maz eo merket war bajenn gentañ pep niverenn  
e vez embannet ar pennadoù dindan atebegzh ar skrivagnerion.  
Ur gelaouenn a gengej hag a genstudi ez eo da gentañ evit ar  
poent.

\*\*\*\*\*

08.05.70

"Met n'eo ket a-walc'h bezañ broadelourion. Ouzhpenn  
impalaerelezh vBro-C'hall o vougañ emskiant broadel hor pobl hon  
eus da ziskar ; bez hon eus da lemel diwarni gwaskerezh ar reizhiad  
kevalaour. Ne dalvezfe ket ar boan lakaat bourc'hizion vrezhon  
e-lec'h re Vro-C'hall memes ma strakfe ar gwenn-ha-du a-us da  
zorioù holl maerdioù hor bro na memes ma vefe kenteliet dre ar  
brezhoneg dre Breizh a-bezh. An hevelep yev a vefe atav war choug  
al labourerion : ar re-mañ ivez o deus ar gwir da dañva blaz ar  
frankiz.

Hor pobl n'eo ket sotoc'h eget re all : pa gomzimp  
dezhi eus frankiz e selaouo ac'hanomp maz eo en gwirionez frankiz  
a ginnigimp dezhi. Pa venner kas da benn un obererezh dispac'hel  
e ranker gouzout ez resis da be bal e stourmer. Diouzh an dibaboù  
a ouezimp ober hiziv e vo warc'hoazh rezid hor pobl..."

R. Anat eo ne ziskoulmo ket ar frankiz pe kentoc'h  
ar stad emveliek holl gudennoù Breizhiz, dre un taol bazh-hud, holl  
gudennoù ar vroad, goude ma vije diazezet ar sokialouriezh zoken.  
Gouzout a reer penaos e Yougo-Slavia, da skouer, ez eus bet kavet  
"burutellerion" evit tamall d'ar Strollad komunour eno bezañ  
diazezet ur vourc'hiziezh giz nevez, harpet war framm ar strollad.  
Ar fazi eo krediñ ee eo an arallekadur stag ouzh ar  
galloud armerzhel hepken ; e gwirionez eo stag ouzh kement beli  
ha galloud a zo. Beze c'heller lavarout eta ez eo gwell ar reizhiad  
sokialour eget an hini kevalaour met arabat hol lakaat da grediñ  
- pezh a ra meur a hini - e vo diazezet warc'hoazh baradoz an  
douar. War evezh e ranker chom atav eta.

-----  
D E V E Z H I O U - S T U D I E . B . V . E - P A D A N H A N V  
-----

Dalc'het e vo Devezhioù-studi E.B.V. en hañv-mañ etre  
ar merc'her 29 a viz Gouere 1970 hag ar merc'her 12 a viz Eost 1970.  
Priz an devezh a vo 11 pe 12 lur. Ar re o defe c'hoant kemer perzh  
en devezhioù-studi-mañ a zo aliet da skrivañ da E.B.V., 30 place des  
Lices, RENNES.

-----  
Licskrivet gant ar gelaouenn

Ar merour : Y.Ollivier



